

HEKLEV SEVENADUREL



A-dreuz lenn

2



Petra nevez ?

8



Notennoù

25



Herve LATIMIER

**Jésuites, Une
multibiographie,
1. Les conquérants,
2. Les revenants,**
gant Jean Lacouture,
Le Seuil, 1991, 1995 (poche),
12€ an tamm



Jean Lacouture (9 a viz Even 1921-16 a viz Gouere 2015) a oa ur c'helaouenner brudet hag un den a-gleiz. E-touez al levrioù niverus bet skrivet gantañ ez eus un toullad buhezskridoù a-feson. Gwelet eo al labour en

deus savet a-zivout ar Jezuisted evel un oberenn a bouez. Ma strollar an div levrenn e kaver war-dro 1300 pajenn leun a ditouroù diniver hag a zielfennadurioù dedennus. Koulskoude e c'hell lodennoù

zo bezañ lennet evel ur romant abalamour da avanturioù an dud dibar taolennet enno.

Displegañ a ra an aozer n'eo ket e labour « istor ar Jezuisted » met « istorioù Jezuisted ». Kompren a reer evel-se an eil titl : « *Une multibiographie* ». Ne 'm eus ket kavet ken sklaer an traoù bepred. Anat eo ez eo un den pe meur a hini danvez pennañ chabistroù zo met chabistroù all zo diwar-benn un dodenn gwelet en ur prantad eus an istor : ar sentidigezh, emzalc'h ar Gompagnunezh e-keñver ar merc'hed, e-keñver ar Yuzevien... pe ur prantad istor resis ma weler kentoc'h an aozadur en e bezh (an tabut gant ar Jañsenisted, ar prantad ma vez divodet an urzh [1773-1814], prantad e zistro). Mesket e vez an daou sell peurliesañ, evel-just.

Anzav a rae Jean Lacouture n'helle ket skrivañ buhezskrid tud na blijent ket dezhañ. Ret 'oa dezhañ santout un empatiezh bennak ganto. Anat eo en oberenn ez eo bamet dirak ar Gompagnunezh pe muioc'h c'hoazh dirak ar personelezhioù dibar a gaver niverus en istor an aozadur. Ne vir ket outañ da varn garv an dibaboù graet gantañ da

vareoù zo (s.o. Chabistr V an eil lodenn : *Les grenadiers de Pie IX* pe an emzalc'h e-keñver an tad Pierre Teilhard de Chardin, chabistr XI, da skouer).

Chom a ra un doare mister en istor Kevredigezh Jezuz. Echuiñ a ra an oberenn war ar goulenn-se : perak en deus dibabet un niver bras a baotred speredek, brokus, leun a intrudu, desket, desket-bras zoken, digor war ar bed hag ar sevenadurioù, skiantourien a bouez alies, ouzhpennañ da reolennoù strizh an Iliz katolik e-keñver he beleien, ur reolenn a sentidigezh strishoc'h c'hoazh ? Ar gerioù *perinde ac cadaver* a gaver alies, titl ur chabistr, pevare al levrenn gentañ eo zoken. Sentiñ ouzh ar Pab « evel ma vefed ur c'helan »...

Penaos chom hep bezañ bamet gant buhezioù avanturus Eneko (pe Ignazio) de Loyola, unan eus krouerien an urzh – bet degemeret en 1540 gant ar Pab Paol III – ha kentañ “jeneral”, Frantzisko Xabierkoa (Frañsez Xavier, chabistr V - levrenn gentañ), Matteo Ricci (Chabistr IX - memes levrenn), Alexandre de Rhodes (Chabistr X - memes levrenn), Antonio Ruiz de Montoya (Chabistr XIII - memes levrenn), Pierre-Jean De Smet

(chabistr IV - an eil levrenn) ha kement a re all. An holl anezho kalonek, youlet, digor d'ar sevenadurioù all (Japan, Sina, Viêtname, Indianed Gwarani, Indianed Amerika an Norzh) ha prest da c'houzañv evit treuzkas an Aviel.

Un niver bras a skiantourien a live uhel a gaver meneget el levrierevez.

Unan eus perzhioù pennañ an Urzh eo ar pouez roet d'an ober. Santet e vez en e c'her-stur *ad maiorem Dei gloriam* n'eo ket "brasañ" met "brasoc'h" : mont er-maez ; mont war-raok ; bezañ er bed, « holl d'an holl ». Abalamour da se e veze tamallet dezho bezañ un tamm "laosk" gant ar bec'herien, bezañ re dost eus ar galloud a-wechoù, bezañ eus "tu Pelagius" kentoc'h eget eus hini Eosten, hep kontañ ar vrud padus da vezañ itrikerien ha levezonerien damguzh, nag an tabut a-zivout selloù an tadoù Teilhard pe de Lubac war ar grouadelezh diechu ha perzh Mab ha Merc'h-den enni... Pouez a roe an aozadur d'an deskadurezh ivez. Ar pezh a reas eus ar Jezuisted pedagogourien vrudet.

Un istor a c'hellfe magañ ur romant eo hini ar Jezuistez

nemeti bet degemeret, en un doare kuzh, en Urzh daoust d'ur reolenn strizh war ar poent-se : Janed Aostria (1535-1573), merc'h da Charlez V an Impalaeriezh Santel, c'hoar da Fulup II a Vro-Spagn, intañvez roue Portugal (s.o. chabistr VI al lodenn gentañ *Pas de femmes* !). Ur souezhadenn all evidon : p'eo bet divodet an Urzh e 1773 gant ar Pab Klemañs XIV e c'hellas treuzvevañ a-drugarez da Frederig II a Brusia ha Kate-lin II a Rusia, ur roue protestant hag un impalaerez ortodoks... Pinvidik, luziet, forc'hellek alies eo istor *Societas Jesu*. Kement a darvoudoù hag a dabutoù ha emdroadurioù a-hed buhez ar Gompagnunezh : evit gouzout hiroc'h, lennit al levrier.

Ur seblant (pe get ?) : dilennet eo bet e 2013 evit ar wech kentañ ur Pab jezuist. Koulskoude ez eo unan eus boazioù an Urzh nac'hañ ar c'hargoù en Iliz. Un toullad eskibien pe gardinaled zo bet dibabet e-touez ar Jezuisted c'hoazh, met ur Pab ! Ne baouezer ket da vezañ souezhet gant an aozadur-se eta.

**La droite et la gauche,
Histoire et destin,**
gant Marcel Gauchet,
Gallimard, 2021,
168 pajenn, 14€



Un istorour ha prederour eo Marcel Gauchet. Rener studioù *emeritus* eus Skol ar Studioù Uhel war ar Skiantoù Sokial (EHESS) eo. Bet eo bet penn-skridaozer ar gelaouenn *Le Débat*, bet krouet gantañ ha Pierre Nora e 1980 hag aet da get e 2020. Hervez ar pezh em eus lennet war *Wikipedia* e oa tost eus ar saviadelourien hag an emdarzhelourien e-kerzh ar bloavezhioù 68 hag e vez tamallet dezhañ gant tud zo abaoe ar bloavezhioù 2000 bezañ mirour ha kilstourmer. Skrivet en deus ouzhpenn tregont levr gouestlet, evit an darn vrasañ, d'ur preder war ar politikerezh.

En tri chabistr kentañ (*Les assemblées révolutionnaires ou le faux départ* ; *La restauration aux origines de la tradition parlementaire française* ; *L'ère des massens : de la topographie des chambres aux catégories de*

l'identité) e weler orin ar meizadoù, kleiz ha dehoù, o staliadur er gevredigezh hag o c'hemm ster.

Evel kalz tud em boa klevet, ha kredet, e teue implij ar gerioù-se eus prantad an Dispac'h gall. Souezhus eo deskiñ n'eo ket ken gwir-se. Evit abegoù ideologel da gentañ : evit an dispac'herien n'hell ket bezañ eus strolloù pe rannoù er bobl. Hervez Le Chapelier (p.22) ar mennozhioù a zlee bezañ re un hinienn nemetken evit ma tiwanfe diwarno ar youl hollek. Ha koulskoude e oa renket ar gannaded er gambr hervez o mennozhioù eus an tu dehoù d'an tu kleiz. Ar re a glaske ober a-hend all a blege abalamour da levezon an arvesterien (s.o. testeni ar baron de Granville, p.22). Un doare dislavar eta. Ne veze ket implijet ar gerioù kleiz ha dehoù pa vezen implijet, en

diavaez eus rentaoù-kont an daeloù. Un evezhiadenn bouezus a gaver p.27 : « *La bipartition conceptuelle entre droite et gauche entretien d'étroits rapports avec une tripartition réelle articulée autour du centre.* » N'eo ket evel e Breizh-Veur m'emañ tu ar gouarnamant hag an tu-enep tal-ouzh-tal.

La Restauration : aux origines de la tradition eo titl an eil chabistr. Diazezet eo implij ar gerioù met chom a ra yezh ar parlamant e-keñver lec'hiadur er gambr daoust ma teu tamm-ha-tamm un doare da sevel identelezh politikel pep hini. En ur dremen e veneg an aozer unan eus nerzhioù ar c'houblad meizadoù : « [...] *il permet de tenir ensemble l'idée d'un antagonisme radical et le dégradé continu d'un spectre indéfiniment décomposable.* » Pep tu unvan da vare an dilennadegoù da skouer ha kalz soutiloc'h an traoù er parlamant goude...

N'eo nemet adalek ar bloavezhioù 1900 e teu ar gerioù da vezañ gerioù degemeret gant an holl. E-pad pell e veze klevet « mirourien / republikaned » pe « re wenn / re ruz » evit envel an daou “du”. Klasket en deus ar

PCF cheñch an traoù gant ar sell “renkad enep renkad” a-raok dont eus e du da implijout ar ger “tu kleiz” ; o vezañ, eñ, an tu kleiz “gwirion” er bloavezhioù tregont. Deuet eo un doare evit pep keodedour d'en em lec'hiañ (chabistr 3, *L'ère des masses : de la topographie des chambres aux catégories de l'identité*). Er chabistroù 4 ha 5 e weler ar wikefre o vont en-dro gant kemmoù liammet ouzh an degouezhioù (eil brezel bed...) pe eus ar sistem dilennadegoù gant disoc'hoù un tamm souezhus : « *Elle [ar rannadur etre tu dehoù ha tu kleiz] est le totem ô combien expressif d'une société dont ce n'est pas la moindre étrangeté que d'avoir combiné une politisation traditionnellement forte avec des organisations politiques chroniquement faibles.* » (p.106)

Deuet eo rannadur ar politikerzh da vezañ hollvedel met hag-eñ ez eo heñvel c'hoazh ouzh ar pezh a oa er penn kentañ e Frañs. Kemmoù divent zo c'hoarvezet er gevredigezh hag er bed abaoe 1945. Ar chabistr diwezhañ, *Sur l'organisation dualiste des sociétés contemporaines*, a glask degas respontoù. Evit ar renadoù hollvelour an

dislavar, an dizunvaniezh zo un torfed ; ret eo distreiñ d'an Unan. Chom a ra mojennek seurt diskoulm. An dislavaroù hag an dael a seblant diazez an demokratelezh. Daoust d'ur gevredigezh luzietoc'h, da gresk an hinieneleouriezh, d'an doareoù liesseurt da rannañ an dud, d'ar c'hoant da welout er parlamant ur skeudenn eus holl rannoù ar gevredigezh e chom, evit abegoù liesseurt, dehoù ha kleiz ur stumm evit pep hini d'en em lec'hiañ war an dachenn bolitikel ha pa ne vefe ket ken kreñv ha sklaer ha m'eo bet.

En div lodenn ziwezhañ (klozadur ha goude-skrid) e ro an aozer e soñj war an amzer-vremañ. Ur bern dielfennadurioù dedennus met chom a reer war e

c'hoant pa soñjer er pezh a c'hoarvez evit dilennadegoù 2022. Gwir eo eo bet embannet al levr e 2021...

Amster e chom ma soñj war an oberenn, ur yezh diaes, ur framm start da heuliañ alies (kavet 'vez daveoù istorel war ar memes prantadoù strewet betek re) ; ur santimant bale er vrumenn pa vefe c'hoant kaout sklêrijenn. Ur bern traoù mat koulskoude ; titouroù e-leizh hag evezhiadennoù prizius.

En em c'houlenn a ran ha-geñ ne vefe ket bet gwelloc'h d'an aozer klask ober ur arnod-skrid berroc'h hag eeunoc'h en doare da ginnig an traoù. Deden-nus-kaer an dodenn, un tamm dipitus an disoc'h. Deoc'h d'ober ho soñj ma fell deoc'h...

PETRA NEVEZ ?



**Magali BARON,
Herve LATIMIER,
Emmanuel PASTORI &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

Kan ar mel,
gant Yannig Audran,
Al Liamm
234 fajenn, 14 €



Zuluan a zo ur paotr yaouank dall a orin eus Bro-Bondi. Marv eo e vamm abaoe pell zo, ha pa zichañs d’e dad mervel d’e dro en un doare kevrinus en em gav ar paotrig e-unan da vat.

Ret e vo dezhañ neuze kimia-diñ diouzh ar plac’hig a oa deuet da vezañ e vignonez wellañ...

Kaset e vez an emzivad da di un eontr dezhañ. Hemañ a zo sañset ober war e dro, met n’eo nemet ul lonker daonet ha gwallgas a ra ar paotr yaouank. Dont a ra ar paotr yaouank a-benn da dec’hout kuit eus ti e eontr, goude bezañ lakaet anezhañ da baeañ evit e dorfedoù.

En em gavout a ra neuze ar paotr yaouank e Pondi, ha dreistbevañ a ra en ur seniñ gant ar fleüt a oa bet profet dezhañ gant e dad. Dall eo gwir eo, met sot n'eo ket tamm ebet. Div-skouarn tanav en deus ivez, ha gouest eo ar paotr da zerc'hel soñj eus kement ton bet klevet gantañ.

Kejañ a ra neuze gant ur soner hag a ginnig dezhañ bezañ e gomper. Goude marv hennezh en em gav gant un ofisour a ginnig dezhañ mont da Bariz, ha du-se e vo desket dezhañ lenn ar skritur brailh.

Du-se e raio anaoudegezh gant tud a bep seurt, hag e tesko seniñ gant ur bern beñvegoù all, kent distreiñ d'e vro c'henidik. Ha dizoloet e vo kevrin marv tad Zuluan ?

Ur romant dreist eo hemañ. Mignoniezh, karantez ha traoù all a vo kavet gant al lenner.

Petra eo sekred marv tad Zuluan ? Ret e vo gortoz fin al levr evit gouzout an dra-se !

Ur veaj en istor an hini eo ivez a vez kinniget d'al lenner gant Yannig Audran. Ne oa ket Breizh an XIX^{vet} kantved ur baradoz nag evit ar re nammet nag evit ar re baour. Ur bern merc'hed a varv en ur c'henel

bugale, ar c'holera a zo oc'h ober e reuz e kornioù zo, ha start eo an traoù evit an darn vrasañ eus an dud. Amzer ar glaskerien-vara e oa...

Awenet eo ar skrivagner gant ar sonerezh, ar pezh a vez merzet diouzhtu en ur lenn al levr.

Netra souezhus pa ouzer e oa bet Yannig Audran soner bombard, ha penn-soner zoken e Kerlenn Pondi.

Ar yezh a zo pinvidik spon-tus, ha da ziwall a zo marteze evit ar re n'int ket kustum gant brezhoneg Gwened, ken uhel eo al live yezh. Met an neb a venn, hennezh a c'hall !

Un teñzor lennegel eo al levr-mañ, evit an holl evel-just met muioc'h c'hoazh evit tud Bro-Bondi a gavo e-barzh boued forzh pegement.

EP

Ar Marc'h Dall,
Le cheval aveugle,
 testennoù gant Job an Irien,
 sonerezh gant René Abjean
 skeudennoù gant Geoffrey
 Berniolle,
 Bannoù-Heol,
 53 fajenn mui CD, 22,90€



Un taol-kaer nevez en deus graet Arno Elegoed hag emban-nadurioù *Bannoù-Heol*. Goude *Kan ar bed*, hag en deus graet berzh bras, setu *Ar Marc'h Dall*, doare nevez eus ar ganadenn skrivet gant Job an Irien ha sonaozet gant René Abjean. Mouezhioù ha binvioù seniñ liesorin a vez roet da glevet : eus Korsika, Bulgaria ha Breizh. Aes e vo anavezout mouezh aour-teñval Gilles Servat en o zouez. Tost da gant soner. Ur bam !

Un oberenn greñv hag engoustlet eo *Ar Marc'h Dall*. Ar marc'h marvailhus-se, glas-gwer e voue, a vez aroueziet ene gloazet ha dallet pobl Vreizh gantañ. Kregiñ a reer gant amzerioù ar vezh, ar brezelioù, an divroañ, dilez ar brezhoneg, distaol an hengoun hag e ouelioù. « Eeunet on war ar re all / Ha desket zo bet din / Ne oan netra hep Bro-C'hall / Na bev na

pinvidik. » Komzoù politikel didroidell ma 'z eus ! Ha pelloc'h : « Gwisket az peus dilhad un all / Nevez da di 'vel ar re all / Kaozeal a rez yezh ur vro all / Selaou a rez sonioù un all / Warc'hoazh e vi 'vel ur vro all / Warc'hoazh e vi 'vel ur marc'h dall. » Er pajennoù 8-9 ez eus bet skeudennaouet ur mekanik ramzel gant Geoffrey Berniolle. Diouzh un tu e teu Breizhiz e-barzh, joaius anezho, gwisket gant dilhad livus ar vro, diouzh un tu all ez a kêriz er-maez, izel o chouk, gris hag unton o dilhad. Brevet int bet gant "ar mestr", da lavarout eo Bro-C'hall ha touelloù ur vodernelezh veuraet. Tud diwriziennet, poanierien sentus ha doujus. « Ha da hêrezh a lealded / 'Deus roet din pep brezel. » Ha da c'hopr goude boserezh ar brezelioù ? « Dorn da vestr a nac'h da yezh. »

N'eo ket evit hadañ dizesper m'o deus aozet Job an Irien ha

René Abjean o c'hanadenn avat. E cheñchamantoù lusk ar sone-rezh e santer mare an dihun. « Dihun 'ta, sav da benn », « Digor e 'n amzer-da-zont / Terriñ 'rez da chadenn. » Rak n'eo ket diviet ar Marc'h Dall : « N'out ket marvet dindan ar yev / Dindan al ludu 'z eus un elfenn », « Deus d'ar sioulder hag e weli / Ur bed ennout o tihuniñ. » Gouestlet eo fin an oberenn d'al levenez adkavet, da ene Breizh oc'h advleuniañ, d'al levenez peoc'hus o tont en-dro...

N'eo ket echu. E-barzh al levr, goude bezañ titouret al lennerien diwar-benn ar binvioù seniñ keltiek nebeutoc'h anavez-zet, ha goude bezañ aterset ijinour ar son, Joris Inadias, diwar-benn troioù ha distroioù avantur


ar sonenrollañ hag ar mastere-kaat, e teu un destenn a bouez, sinet gant an istorour Loeiz Elegoed, dindan an talbenn : « Kudenn ar yezh hag ar sevenadur e Breizh-Izel abaoe an XVIII^{vet} kantved ». Enni e vez displeget sklaer drektalenn¹ istorel ha sokiologel an oberenn.

Ul labour klok, barzhoniell, pedagogel ha politikel a vez kinniget deomp neuze, mat da zibikouzañ kement marc'h dall a zo e Breizh ! Ur sapre chanter ! Anavezet eo al lavar-pobl : « Diwar c'hoari, kelenn ». Mat e vefe ouzhpennañ : « diwar fromañ, dihuniñ ». Na glaskit ket pelloc'h evit ho profoù Nedeleg...

MbdB

1 Drektalenn : *arrière-plan*

**Geriadur ar Vezekniezh
Galleg-saozneg-
brezhoneg,
Rann 13 : Tuberculisation-
Zymotique,
Preder,
224 pajenn, 22€**



« Rann 13 Geriadur ar Vezekniezh a verk diwezh un hir a avantur », a lenner war ar

blegfollenn ginnig. A zo gwir ! Nag un drevell ! Nag un akt a feiz ! Boule'het e oa bet ar

chanter hanter-kant vloaz zo gant Guy Etienne, diwar e notennoù studier war ar medisinerzh, ha peurechuet eo bet an embann gant Yann-Ber an Noalleg goude marv e geneil e 2015. 2145 pajenn ha 15 506 enmoned a ya d'ober ar pikol geriadur-mañ. Derc'hel a ra e renk e-touez binvioù yezhel arbennik all bet goveliet gant skipailh Preder a-hed ar

bloavezhioù evit reiñ un dazont d'ar brezhoneg er bed hiziv. Geriadur an Armerzh, ar Jedoniezh, ar Gimiezh, ar Fizik, ar Mediaoù, ar Geginouriezh... Ha n'eo ket echu. Biken ne vo. A-benn nebeut e teuio er-maez niverenn 21 an dastumad Lavar, ma vez studiet, hep skuizhañ, ezhommoù ha doareoù hor yezh kempred...

MbdB

Gwernioù kuzhet,
gant Marie-Josée Christien,
luc'hskeudennoù
gant Yann Champeau,
brezhoneg gant Jil Penneg,
Editions Sauvages,
120 pajenn, 29€



Sed ur brav a genlabour etre ar varzhez Marie-Josée Christien, al luc'hskeudenner Yann Champeau hag an troer Jil Penneg. N'eo ket ar wech kentañ ma vez awenet hor barzhed gant dodenn ar gwernioù. Soñjal a reer e Gérard le Gouic (*Les marais et les jours*), e Michel Le Bris (*Yeuñ Elez, un autre monde*, skeudennaouet gant Yann Champeau), pe e Seamus Heaney, tramor, gant e *Bogland*. Teogus eo ar gwernioù. Un dreuzell ez int etre bedoù enebed

ha difin : ar gorre hag an islonk, al livioù flamm hag an du-peg, ar framm hag an diframm, an douar hag an dour, an dour hag an oabl, ar vuhez hag an divuhez. Eus ur poent kej gant an dianav ez eus kont : « an deñvalijenn hag ar sklêrijenn / hor c'has / d'an diberc'henn. » Ul lec'h ma vez broudet ar c'hantreadennoù hag ar brederi : « Talm ar galon / sioul sibouron / er gwernioù / difiñv ha tavedek / gorrekoc'h ar preder. »

Un dachenn c'hoari hep he far eo ar gwernioù evit ul luc'h-skeudenner. Yann Champeau a oar reiñ da santout emgav karantezus ur bed o vervel gant ur bed o c'henel. Labour diba-ouez ar goiñ, ken er wern, ken er galon. Un dra bennak a zo o tisperiñ hag o kemer tres dizehan. Tapet en deus Yann Champeau kevrin ar gwernioù, eus ar munudoù soutilañ betek an taolennoù difetis. Termal a

reer etre lid kañv ha banvez eured... Un dudi evit an daoulagad. N'eus nemet un dra ha n'eo ket bet eztaolet gant Mari-José Christien : moustrouz al loened-dour da rouz an noz ha boubou an amprevaned. War dav e chom he gwern, evel ur sinfonienn vut. Trugarez da Jil Penneg da vezañ kouviet ac'hanomp d'ar veaj-se en ur brezhoneg eeun hag heson.


MbdB

**Renabl peuzhollek an
netraigoù,
gant Herve Gouedard,
Al Liamm,
238 pajenn, 12€**

Renabl peuzhollek an netraigoù, sed aze un titl souezhus !

Un dastumad testennoù ac'h a d'ober al levr-mañ, dindan stumm pennadoù. Tri c'hant a zo, reoù zo a zo berr-tre, peder pe bemp linenn, ha reoù all a zo kalz hiroc'h, div pe deir fajennad.

Liesseurt eo danvez ar pennadoù. Ne seblantont ket din bezañ renket dre un urzh splann.



Ne vern. Alies e vo kavet e-barzh gant al lenner peadra da brederiañ.

Ar pennad diwar-benn plas an oto e straedoù Sant-Brieg a zo ur skouer vat. Lezel a ra ar skrivagner pep hini d'ober e soñj diwar-benn un dra splann : diaes eo mont da Sant-Brieg gant un oto.

Munudoù war an istor a vo kavet ivez. Tik eo an den gant an istor. Amañ e vo kavet eo dindan ar stumm *Sanctus Briocus* e oa bet meneget ar gêr Sant-Brieg en dielloù koshañ (1032 goude J.-K.).

Roet e vez plas d'an natur el levr. Alies em eus kavet e oa barzhoniezh e doare deskrivañ an aozer.

Kizidigezh ar skrivagner a vez merzet a-hed al levr-mañ.

Kavout a reer ivez poltredu tud Sant-Brieg, ha gwech ebet ne vez graet goap eus an dud-se. Anv zo eus traoù hep barnadenn ebet, karantez ne lavaran ket, evit ar re spontusañ anezhe zoken.

Klotañ a ra mat-tre titl al levr gant an danvez a gaver e-barzh. Evit ar skrivagner ne dalvez ket eo didalvoud an “netraigoù”-se. Ar c’hontrol an hini eo, da’m meno. Pa vezont lakaet asambles e wel al lenner ur poltred eus kêr Sant-Brieg hag he zrowardroioù disheñvel eus ar pezh a vez klevet alies diwar-benn ar gêr-se. Klevet e vez ordin gant an dud n’eus mann ebet d’ober na da welet eno. Ar skrivagner en em gav brav du-se koulskoude, ha gwir eo e ro c’hoant da vont war e roudoù,

ha diskoachañ an traoù meneget gantañ. Savadurioù bet treset gant James Bouillé, ezel eus strollad Ar Seizh Breur da skouer pe lec’hioù all kinniget deomp.


Kêr Sant-Brieg eo harozez al levr-mañ, met ar vro tro-dro ne vez ket lezet a-gostez gant ar skrivagner. Met gant piv eo bet skrivet al levr ?

Er raklavar e skriv Herve Gouedard e oa bet fiziet ennañ danvez al levr-mañ gant un den anvet Herri Goulard, ur skrid ha ne vije ket bet kemmet tamm ebet gant Herve Gouedard.

Da bep hini d’ober e soñj, ur wech ouzhpenn. Ul levr a ra vad lenn, se zo splann.

EP

Koupaia,
gant Laurence Lavrand,
Keit Vimp Bev,
Priz ar yaouankiz,
40 pajenn, 5€



Levrioù berr, marc'had-mat hag aes da lenn a vez embannet ingal gant *Keit Vimp Bev* evit broudañ al lenn e-touez ar re yaouank. Gant se e klask an aozerien dibab temoù kevredigezhel a c'hellfe tizhout spered ha kalon al lennerien yaouank, en ur zigeriñ o spered : an torr-dimeziñ, ar ouennelouriezh, ar feulster... Eus teorienn ar jener ez eus anv en danevell-mañ. Koupaia he deus ur vignonez feal, anvet Lorna. Ganet eo Lorna en ur familh bourc'hizien a-gozh. Maxime, breur Lorna, a venn cheñch reizh. E vamm a sav a-enep krenn, c'hoant ganti e c'hortozfe he mab e seitek vloaz, e kenkaz e cheñchfe mennozh gant an amzer.

Un dodenn nevez eo, din da c'houzout, e bedig hol lennegezh evit ar grennarded. Gant Yann-Fulup Dupuy e oa bet pleustret


c'hoazh, met evit lennerien muioc'h arroutet marteze. Gant *Koupaia* ez eus anv eus pedagogiezh, eus skouer-vat, eus derea-degezh, met ivez eus c'hoant don hag eus dishualded... Dav deomp digeriñ hor spered evit degemer natur ha c'hoantoù disheñvel an dud ha doujañ d'o frankiz. Un tem kempred ma 'z eus. Un dra vat eo, da'm soñj, e vefe lakaet ar re yaouank hag ar re vras d'en em soñjal war se. Un tamm manikeek em eus kavet an doare evelkent. War zigarez astenn ar gaoz war tem ar jener hag ar boan a c'hell dont d'e heul e buhez tud yaouank zo, e vez graet div lodenn zistag. Diouzh un tu, ar re a zo en o c'haou : tud an urzh kozh, ar vourc'hizien, ali gant ar relijion ha gant un disparti kreñv etre roll ar merc'hed hag ar baotred. Ar vamm-gozh fallakr

a zo arouez ar bed kozh strizh-speredet-se. Diouzh an tu all, an dud a zo en o gwir hag en o frankiz : Maxime hag an holl re a sav a-du gant Maxime. Seul anatoc'h seul eeunekoc'h siwazh. Rak treuzet e vez ar metoù sokial gant seurt degouezhioù. Tennañ a ra Koupaia d'ur flemmskeudenn. Talvoudus eo al levr avat. Ul leurenn lañs

a-feson e vo, emichañs, evit ma vo kaozeet eus ar c'hraf-se e-touez ar grennarded. Gwell a se. Gouzout a ouzon pegen diaes eo displegañ hep kenteliañ, diskouez hep rediañ, goulenn hep respont... Gwalleur ar goulenn eo ar respont, a skrive Maurice Blanchot.

MbdB

Koktel ar vuhez 3,
gant Jil Penneg,
Al Liamm,
92 pajenn, 10€



Berr a-walc'h ha mestroniet mat eo levrenn ziwezhañ *Koktel ar vuhez*. Doujet e vez da ben-naennoù an drilogiezh : livañ buhez tud ordinal, evel pa vefe kinniget ur melezour d'al lennerien ; dielfennañ o zemz-spered, o sioù fall, o c'hwitadennoù, o strivoù, hep klask bravaat anezhe ; ha dreist-holl lakaat an eil re da gouezhañ war hent ar re all, en doareoù liesseurt, dic'hortoz ha fentus a-walc'h.

Labouret en deus Jil Penneg gant sikour Youna Ruellan ; flouroc'h moarvat eo deuet al levr da vezañ a-drugarez d'ar sell-se. Krennet ez eus bet pennadoù zo, astennet re all ; kompouezet mat eo al levr, ha ne vez ket kavet hir e amzer pa vezer splujet e-barzh. War ar poent-se eo gwelloc'h al levr-mañ evit an hini kent, ha n'heller nemet saludiñ al labour adstummañ bet graet hag an uvelded en deus

diskouezet an aozer oc'h asantiñ da cheñchamantoù bras.

War dachenn an istor hag ar sokologiezh en deus kavet an aozer danvez dedennus. Kaoz zo peurgetket eus lizhiri bet kavet gant Julia er c'hrignol goude marv he zud. Tu a vefe bet d'astenn ar gaoz c'hoazh war al lizhiri-se, bet skrivet e-pad ar Brezel-bed kentañ. Damlâret a reont penaos e teue ur beleg da "frealziñ" ar merc'hed bet laosket o-unan ha distur un tamm. En tu-hont da lakaat Julia da furchal en istor he hendadoù eo plijus-tre an istor-se, ha degas a ra soñj eus pennadoù gwellañ al levrenn gentañ.

Reiñ a ra tro da Jil Penneg da brestañ e bluenn da vamm-ioù Julia, ha da glask dreveziñ stil al lizhiri d'ar c'houlz-se. Un doare liesvouezhiek ha liesseurt a zo forzh penaos gant al levr : da skouer e laka Mari-Thérèse Lagadeg da skrivañ diwar-benn he c'hoar Soaz, bet marvet e 2003 e-pad devezhioù tommgor an hañv. Gant ar seurt danevell verr-mañ e klask en em silañ e spered ur vaouez war he zremenvan, ha livañ en un doare gwirion dizurzh ar soñjoù, keuz

d'ar vuhez, poan ha trouz mesk-ha-mesk.

Adkavout a reer melkoni hag aergelc'h dous-trenk al levrioù kent ; n'eo ket dre zegouezh ez echu c'hoazh al levr-mañ gant obidoù, daoust ma 'z int gwir obidoù ar wech-mañ, ha n'eo ket re faltaziet Yann-Bêr. Frailhoù an tudennoù ha garvder o flanedenn a vez lakaet war wel, hag alies-mat ne zeuont ket a-benn da seveniñ ar pezh int gouest d'ober, na da dizhout an eürusted a c'hortozont. Anton, an hini "na echu morse", eo hep mar ar skouer wellañ eus un den donezonet-mat evit meur a dra, hag a vez krignet gant barradoù anken ha drougiezh. Evit tudennoù zo, Bénédicte da skouer, a oa en ur blegenn fall abaoe al levrenn gentañ, e tro mat an traoù, met ur skrij eo avat gwelet penaos e c'hellje bezañ echuet. Evel Kevin e c'hellfe anzav an tudennoù : « Heñvel omp holl en ur mod, evel al laboused, klask a reomp kanañ ar gwellañ ma c'hallomp dindan ar glav. »

N'eo ket ul levr melkonius koulskoude, rak ar mousfent a gendalc'h da virviñ etre al linennoù. Ar c'hoari gant an tudennoù, ha gant ar c'hejadennoù dic'hortoz, a zo ampart-kenañ,

ha plijadur a vez o vezañ souezhet bep tro. Setu Julia ar Berr ha Ronan Gwilhou o flapat war ar rouedad dindan lesanvioù, ha pa c'hoarvez gante en em gavout dre zegouezh er memes lec'h n'eus ket tu dezhe da c'houzout. Ur gwir pezh-c'hoari eo ar cha-bistroù 5 ha 6 : ar memes senenn en ur preti gwelet diouzh tu ar sal ha diouzh ar gegin, gant sekredoù lavaret kuzh-ha-muz. A-wechoù e krog ur pennad gant un dudenn dianav deomp, ha ne vez diskuliet nemet er fin al liamm a zo ouzh ar steuñvenn hag ouzh an tudennoù all – an istor gant Anton el leti zo truezus ha fentus war un dro, seul vui m'eo siwazh ken amparfal ha ma c'hell Yann-lenner bezañ...

Er c'hoari kroaz-digroaz-se e klask ivez reiñ peadra da brederiañ war an darempredoù etre an dud er bed a-vremañ, daoust m'eo anavezet mat dija ar c'hudennoù-se. Plijout a ra da Julia daremprediñ tud dre ar rouedad, pe en trenioù, peogwir eo aesoc'h diskuliañ traoù intim pa vez gant tud dianav na welo pe na adwelo morse. Ne ouier ket kalz a draoù a-zivout buhez personel Aurélie, a chom kuzhet a-dreñv ar farsadennoù drant servijet d'he fratikoù. Hed a vez

etre an dud a chom peg ouzh skramm o fellgomzer, ha pa vefent kichen-ha-kichen.

A-fet yezh on bet sourprenet o lenn meur a wech “goulenn ma”, e-lec'h “goulenn hag-eñ” ; pe “Gêrledan”, e-lec'h “Gwerledan”. Met pa labourer e bed al levrioù e ouzer mat n'eus bet biskoazh levr disi ebet.

Hegazet un tamm e c'hellfe al lennerien bezañ a-wechoù, pa zeu ar santimant eo fuilhet ha strewet an danvez, hep na c'hellfer heuliañ mat an neudennoù niverus ac'h a d'ober ar steuñvenn. Met a-ratozh-kaer eo se ivez ; ur goapaer dic'hoarzh eo an aozer, a blij dezhañ c'hoari gant al lennerien ha lakaat anezhe da bakañ un disouezhenn gwech an amzer. Pa lâr Yann-Bêr da Gevin : « Ha da raktres labourer-douar ? » e vez respontet dezhañ : « Kalz tud a c'houlenn-se diganin. » Bez' ez eus bet lennerien, me en o zouez, o c'houlenn digant Jil Penneg keloù eus Kevin, a oa bet laosket a-gostez un tamm el levrenn 2. Met ober a raint tro wenn ur wech c'hoazh, rak n'eus ket a nevezinti diwar e benn el levr-mañ kennebeut.


Evel ma vez hegazet Kevin pa glev Yann-Bêr o randoniñ e

teu a-wechoù ar c'hoant da c'houlenn ouzh an aozer : « Petra az peus c'hoant da lâret ? Da belec'h ez peus c'hoant da vont ? » Met a-benn ar fin eo ar gwirvoud a zo fuilhet ha dipitus : raktresoù tud zo n'eont ket war-raok, darempredoù mignoniezh

zo a echu trumm hep abeg, ha tud zo ac'h a diwar wel hep na vefe merzhet zoken. Ha se en deus c'hoant an aozer da ziskouez gant ar stumm bruzunet ha dic'hortoz en deus dibabet.

MB

Marcel Callo,
gant Goulc'han Kervella
Minihi Levenez,
67 pajenn, 12€



Bep bloaz e skriv Goulc'han Kervella ur pezh-c'hoari nevez evit krennarded parrez Ar Folgoad. Displeget e vezont meur a wech, betek Roazhon, Lourdez, Dunkerk... E galleg peurliesañ, gant tammoù brezhoneg, rak brezhonegerien zo e-touez an dremmourien yaouank alies. Diwan Gwiseni ha skolaj Sant Franzez n'emaint ket gwall bell. An destenn voulet a zo divyezhek rik avat. Gant ar pezhioù-c'hoari-se, hervez an aozer, e vez graet anaoudegezh gant tud skouerius, kristenien vrudet pe

vrudetoc'h... Sant Paol a Leon, Sant Gwenole, Jan Jugan...


Ar pezh-c'hoari gouestlet da vMarcel Callo a zo bet skrivet diwar ur buhezskrid savet gant Fañch Morvannou ha lakaet e brezhoneg gant Job an Irien. Heuliañ a reomp red kronologel buhez Marcel, a daolenn da daolenn, dre zivizoù berr ha buhezek, gant displegoù un test, diouzh ret. Souezh ebet neuze war dachenn an doare da gontañ. Met ken kriz ha ken fromus e voe buhez Marcel ma n'eus ket ezhomm da reiñ bec'h evit sant-tout pouez an drama.

Ganet e voe Marcel Callo e 1921, e Roazhon, en ur familh labourerien. Tud a feiz anezho. Kaset e voe da zeskard e Roazhon war ar vicher lizherenner, e metier digristen ma ne oa ket un ebat embann e feiz. Dont a reas da vezañ ezel eus an Y.M.K. (Yaouankizoù Micherourien Kristen, J.O.C. e galleg) koulskoude. E-kreiz an eil Brezel-bed ez eas da Vro-Alamagn dindan an S.T.O. (Servij al Labour Ret). Edo o paouez disklêriañ e garantez d'e gefrisa. Startoc'h e teuas

da vezañ du-hont. Kenderc'hel a reas da vevañ e feiz en ur mod oberiant-kenañ, petra bennak ma oa bet berzet gant ar penna-durezhioù. Savet en doa ur strolad Obererez katolik. Ken e voe kaset da gamp Mauthausen, ma varvas, diviet lip. Betek penn e skoazellas hag e frealzas e gompagnuned hep digalonekaat. Anvet e voe da wenvidig gant ar Pab Yann-Baol II e 1987.

MbdB

**War glask kouevr,
gant Armel Le Sec'h,
Keit Vimp Bev,
64 fajenn, 5€**



Armel Le Sec'h a blij dezhi lec'hiañ he romantoù en amzerioù pell. Ar-wech-mañ ez eo betek bloavezhioù 2000 kent J.-K. e veajomp e-ser Lenn, ur plac'h yaouank disaouzan. E tro-pleg sevenadur an arem emaomp, e dibenn oadvezh ar maen lufret, e-kichen Karn bras

Barnenez, bet savet e Breizh tro 4000 kent J.-K. Oadvezh an arem a voe ur reverzhi deknel ha sevenadurel hervez an arkeologourien. An danvez-se, graet diwar kailh staen ha kailh kouevr, a oa kaletoc'h hag harzus ouzh an taosoù. Ar perzhioù dibar-se a zegasas merdeadurioù


hag eskemmoù puilhoc'h etre an tiriadoù a zeuas da vezañ ar broioù keltiek a anavezomp hiziv an deiz peurgetket.

Tad Lenn en deus desket ober arem, met n'eus ket a gailh kouevr tro-dro. Lenn eo a rank mont en avantur Doue, gant un toullad mignoned, war gaout kouevr en tu all d'ar mor, e kornôg an Enez-Veur (Bro-Gembre a-vremañ). Dre ma valeomp dre e roudoù e teskomp penaos e veve an dud er mare-se. Ar

boderezh, ar bravigoù, ar veta-louriezh, arz al lojeiz, an difennerezh, ar verdeadurezh, ar c'hredennoù kozh, ar skrapoù sklaved ha betek an doare da gaout hollen diwar dour mor... Evit teurel blaz war he c'heusteuenn he deus ouzhpennet Armel Le Sec'h un toullad morlaeron hag ur meudad karantez. Peadra da zegas plijadur da saverien-o-fri adalek eizh-dek vloaz.

MbdB

**Bretons insulaires,
Bretons armoricains,
9 siècles d'Histoire
(-56/851),
gant Jean Danzé,
Yoran embanner,
473 pajenn, 29€**



Ul levr dedennus-tre eo *Bretons insulaires, Bretons armoricains*, dre an titouroù a zegas hag ar goulennoù a chom war-lerc'h al lennadenn. Anat eo ez eo an 9 kantved a ra danvez al levr ur prantad luziet gant nebeut-tre a skridoù, alies testennoù bet skrivet pell goude ar fedoù a gontont. Ret eo kemer harp war an arkeologiezh, ar

yezhoniezh evit klask deskrivañ an traoù. Ar pezh a ra an aozer. Daoust ma c'heller bezañ souezhet gant lodennoù zo, an holl daveoù roet a ziskouez ez eo bet ul labour sirius. Un dra heverk eo an doare ma veneg al levr levezon an ekonomiezh, ar c'hleñvedoù-red, an amzer hag an hin war an darvoudoù, en

diavaez eus ar brezelioù. Gant gwir abeg.

Pevar chabistr ha tregont a gaver el levr, na digoradur na klozadur met ul levrlennadur pinvidik. Heuliañ a ra an aozer red an amzer o vont hag o tont eus Armorika, Enezenn Vreizh, Iwerzhon ha Breizh “vihan” diwezhatoc’h. Marteze eo an dra-se a ro ar santimant, ur wech an amzer, da vezañ kollet un tamm. Rannoù zo a zo evel fichennoù war un dodenn resis. Riskl zo evel-se da vont d’un dodenn d’eben hep kaout bepred ur sell hollek. Etre brezelioù Caius Julius Caesar ha diazeadur rouantelezh Vreizh goude emgann Jengland, ren Salaun hag ar stourmoù ouzh ar Vikinged e kaver ur bern traoù : brezelioù liesseurt, staliadur ar Romaned en Armorika hag e Breizh, ar Romaned o kuitaat, staliadur an Angl-ha-Saozon e Breizh, staliadur ar Vretoned en Armorika... An darempredoù etre ar rummadoù-se a zo kalz luzietoc’h evit ar pezh a c’heller soñjal, etre ar Vretoned hag ar Romaned peurgetket, etre ar Vretoned hag ar Franked, etre ar Vretoned hag Iwerzhoniz, etre ar rummadù Bretoned... Roll ar gristeniezh erruet abred-tre war

an Enezenn Veur (eilvet kantved, sur, kentañ marteze) e staliadur Iwerzhoniz pe Bretoned en Armorika ; an darempredoù kenwerzh gant ar c’hevandir ha broioù ar reter a zo, e-touez re all, dodennoù a gaver e meur a rann. Displeget e vez traoù anavezet bremañ met ne glotont ket dre ret gant ar skeudennoù un tamm eeunik a zo bet e-pad pell. Ur skouer : ar bagadoù kentañ a Vretoned deuet war ar c’hevandir koulz en Armorika hag e lodennoù all eus Galia zo deuet evit difenn an impalaeriezh roman ha miret o deus ar Vretoned ul liamm, evel un doare hiraezh, eviti. Peurgetket e lenner diwar-benn an emgannoù etre Bretoned ha Franked p.348 : « *Il est fort possible que la capacité de résistance des Bretons soit la conséquence de leur fidélité à l’organisation militaire et à l’armement des Romains.* » Ledet eo divroadur ar Vretoned war meur a gantved ha gwask tagadennoù an Angl-ha-Saozon ne oa ket an abeg nemetañ ma oa an hini poue-zusañ : abegoù relijiel evit rummadoù zo, an tec’h dirak kleñvedoù-red evel ar vosenn, diaesterioù al labour-douar abalamour da brantadoù amzer

fall, disurenteziou a bep seurt. War a seblant n'eo ket bet aes bepred staliadur ar Vretoned en Armorika ma heulier dielfennadur Jean Danzé a-zivout an anvioù-lec'h o kregiñ gant "lez" keñveriet gant ar re o kregiñ gant "tre". Estonet on bet o teskiñ ne veze ket kavet anvioù e "plou" a-raok ar bloavezhioù 800. Reiñ a ra eta an holl dielfennadurioù-se c'hoant da vont pelloc'h ganti evit keñveriañ selloù disheñvel ha daelañ diouzh ret. Ur skouer eus selloù a c'hell bezañ gwelet evel enep a gaver diwar-benn ar Bikted. P.70 ez eus un dave da levr Frédéric Kurzawa diwar-benn ar bobl-se. Koulskoude e lenner : « *Tous les combattants bretons qui s'opposaient aux conquérants romains avaient recours aux tatouages ou aux ornements de couleur.* » Pa lenner p.32 e levr Kurzawa : « *On notera que seuls le Pictes avaient la peau tatouée et que cette singularité les distinguait des autres tribus britonnes.* » Traoù heñvel a gaver a-zivout ar yezh komzet gant ar Bikted. Reiñ dave ul levr ha lâret tost ar c'hontrol eus pezh a gaver ennañ a souezh un tamm en un oberenn leun a zaveoù hag a

arroudennoù. Niver ar re-se a ro un diazez kreñv d'an dielfennadurioù met chom a ra bepred un elfenn a zouetañs...

Ne vern. Sur on da vezañ desket ur bern traoù.

Ar pennadoù berr, e stumm ur fichenn, a-zivout danvez-mañ-danvez hag ar morad a zeiziadoù ha lec'hioù meneget ha ro ar santimant da vont eus ar c'hazh d'ar razh pe, d'an nebeutañ da vezañ mezevellet. Laouen e vefen bet o kavout e fin al levr un daolenn o tiskouez an darvoudoù pe ar prantadoù pouezusañ renket hervez an deiziad evit gellout merzout gwelloc'h red an traoù. Dipitet-kaer on bet gant ar c'hartennoù ma kaver dre vras un nebeud pikoù pe anvioù war tres unliv ur vro. Perak ne vez ket diskouezet bevennoù ar rouantelezhioù meneget, pazennoù an aloubadegoù ? Tud zo a oar mat ober se e Breizh. Sikour a ra spontus da gompren an traoù. Souezhet on bet meur a wech o welet niverenn un notenn merket en destenn ha notenn ebet koulskoude (ur skouer a gaver p.79 gant an notenn 33 pe p.381 gant an notenn 7).

Gwellaennoù d'ober pa vo adembannet ul levr a zegas d'e

lennerien gouiziegezh e-leizh war ul lodenn a bouez eus hon istor.

Ur wellaenn all vo d'ober : cheñch ar golo. Goût 'ouzon e plij da Yoran reiñ neuz ul levr avantur evit krennarded ar bloa-

vezhioù 1960 d'ul lodenn vras eus ar pezh a embann met ne glot tamm ebet gant danvez skiantel an oberenn-mañ. Ne oa ket tu da gemer skouer war golo levr Frédéric Kurzawa ?

HL

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

PROFOÙ _____

Miz Gwengolo : Loic CAMPION ; Herve AR BEG ; Pieig AN
DIGERC'HER ; Gilbert KEROUANTON ; Jean OLLIVRO ;
André Verbrugghen ; Pêr DREZEN ; Herve PEAUDECERF ;
Lucien NOZZI ; Serge AUBIN

— War un dro : 155€

Miz Here : Michel LESCOP ; Vincent PINCEMIN ; Gérard MEREL ; Armel LE SEC'H ; Yann-Loeiz KABELL ; Tremeur GUILLAUMIE ; Alain BOUVET ; Gwenael BARON

— War un dro : 210€

Miz Du : Mari-Soaz AR C'HOZH ; Colette VINCENT-KERRAIN ; Filip OILLO ; Robert PERROUD ; Daniel KERNALEGENN ; Bernez TANGI ; Janig STEPHENS ; Pêr LEMOINE ; Helene BLANCHARD ; Iwan COUEE ; Alan MARTEL ; Alain JOIN ; Eric CHEVALLIER ; Hubert ARZEL ; Jakez MEREL ; Danielle GUEYDON ; Fañch JESTIN ; Jean-Yves ALLAIN

— War un dro : 690€

Bet digant Pascal Rannou :

Setu petra 'm eus da respont goude respont H. Latimier d'am respont...

Bras-meurbed eo ego HL : ur bajenn evit displegañ deomp pegen barreg eo war dachenn ar brezhoneg : mat, matres n'o ket taol-mouezh Bro Dreger ken kreñv evel hini ar Poher, med muioc'h evit div pe teir frazenn 'zo bet eskemmet etrezomp : e saloñ Karaez 2021, ya, med ur bloavezh araok oan bet o komz asamblez gantañ e-pad deg vunudenn, 'pa 'm eus kinniget ma levr dezhañ ha kontet e istor. Eno 'n eus kontet din HL hag e oa bet o labourat e Skol-Veur Roazhon, ha goude e Paris. Ma oa bet ankoueet an dra-se gant HL e vefe bet aes goulenn diganin...

Med n'eo ket respontet d'am arguzenn : 'blam petra rebechiñ din pas lakaat maouezed awalc'h ba'm levr, pa 'n eus ket maouezed ivez barzh *Al Liamm* ? Propozet vez testennoù da *Al Liamm* ha choajet vez goude : mat, med d'am petra pas kemer maouezed ? 'Blam 'n eus ket : memestra evit lennegezh e galleg. Ped den 'm eus lakaet war hent ar brezhoneg, a houlenn HL : ma bugale, dija, pezh n'eo ket fall evit un tad divroet, gant ur vamm deus Angers, ha war ar marc'had n'on ket na kelenner, na frammer. Gant ma zad e gomzan e brezhoneg nemedken : n'eo ket dre ma faot (c'hoazh !) ma eo pet tapet brezhonegerien all ma familh hag he endro gant an Ankoù... Ha ne oar ket ma zad petra sinifi « fank » : evitañ eo « pri » da lakaat evit « boue » evit ar wech toud. Giz 'meus laret (med « *il n'y a pire sourd que celui qui ne veut pas entendre* ») oa deuet pri Conlie da vezañ fank : « fange », pri evel dour lous. Biskoazh 'me us skrivet hag e oa « milliget » ar geriadurioù : furchal a ran barzh abaoe pell 'zo, med gwelloc'h e gavan komz... Skoazellet 'm eus Diwan, giz 'meus laret, roet chekennoù dezho. Ped merc'h 'zo bet lakaet neuze war hent ar brezhoneg e *Al Liamm* gant HL ?

N'ouzon ket 'blam petra 'neus ket muioc'h a skrivagnerezed e brezhoneg. Med gouzon a ran 'blam petra 'n eus ket kalz e galleg :

dre faot ar sosiete, giz 'm eus laret, ha pas gant Tony Sabiani. Biskoazh 'm eus implijet ar pozh « faot » a-enep Gwendal Denez, Yoran ha Tony : falztamall ahanon a ra HL. Un tammig uhelloc'h eo ma spered eged « *C'est pas moi, c'est lui !* » : ur gunujenn eo. N'eo ket bet gwelet ur fazi ganeomp, goude ma oa bet lennet ivez gant Gwendal : ne laran ket eo dre e faot, meump ket bet chañs pas welet an dra-se, setu toud. Mil-trugarez e laran da wGwendal evit e labour : kalz fazioù all 'zo bet gwelet gantañ, hag ivez ganin, gant Michel Humann, renker ti Yoran, ha gant F. Labbé. N'eo ket dre faot Yoran ma ne gaver ket Mona Ozouf war ar golo : e choaj eo, n'eo ket e faot. An embanner zo mestr war e di. Ha n'eo ket dre faot Tony ma 'neus ket kavet maouezed evit an *Ensiklopediezh*, giz ma n'eo ket dre faot skipailh *Al Liamm* ma n'eo ket dedennet kalz merc'hed gant skriturioù e brezhoneg. Sokial eo ar gudenn-se. Ped maouez ba' *Lagarde & Michard* ? Pemp, matres, evit pemp c'hantved...

Plijet e vo lennerien *Al Liamm* o welet hag eo difennet F. Morvan gant HL... Eviti eo « *kitsch identitaire* » muzik Dan ar Braz, skriv a ra-hi n'eo ket kap Alan Stivell da vezañ komprenet gant ar vrezhonegerien gozh : kasoni ha netra all. Ha sikouret eo-hi bet gant C.-J. Guyonvarc'h, bet barzh ar Bezen Perrot : sapre skouerenn !

Ne teu ket mennozh E. Vallerie da vezañ ma hini : lavar a ran hag a vez kavet enni boued-spered evit hirio, memes ma on a-du awalc'h gantañ. Da gentañ toud e oa e soñj dezhañ.

Ne heller ket kenveriañ Colette ha gallegerien an amzer-vremañ. Un taol-mouezh rannvroel kreñv 'oa ganti, gwir eo, evel gant kalz tud e Bro-C'hall d'ar mare-se. An devez a hirio ivez a gomz tud gant un aksañ ispisial ba' Marseille pe ba'n hanternoz. Galleg ordinal an tele pe ar skol 'zo heñvel awalc'h ouzh hini klevet barzh filmoù sinema pe barzh nevezentioù araok ar brezel 39-45. Brezhoneg deuet da vezañ ordinal hirio, siwazh, zo ur brezhoneg gand muzik ar galleg. Galleg hiriv n'eo ket ur galleg gant un taol-mouezh saozneg : n'eo ket bet cheñchet kalz e vuzik abaoe kant vloazh.

Ne gritikan ket levr Goater 'blam eo menneget oberourezed dianav barzh, med 'blam n'eo ket skrivet gant kalz diouto netra pe dost diwar-benn Breizh. Ha perak neuze kritikañ ahanon 'blam e gomzan deus Villiers de l'Isle-Adam, dianav evit HL ? Bet emañ Villiers barzh dastumadenn ar Pléiade, memestra, pezh n'eo ket na Renan na Brizeux, brudet gwechall, ankoueet hiziv. Labouret 'meus pad pell gant liseidi, ha studiet ganto « *L'intersigne* » hag « *À s'y méprendre* », danevelloù dispar evit studiañ ar « fantastik ». Ur choaj eo un antologiezh, anat eo. Ur choaj eo *Lagarde & Michard*, ha koulskoude n'eo ket skrivet ar pozh choaj war ar golo. Ne gaver ket barzh na Tristan Corbière, na Lautréamont...

Hervez HL e garan pozhioù chimik e galleg, pas e brezhoneg. Peb tachenn 'n eus e leksik. N'eo ket « *attitude, atmosphère, société, culture* » chimik e galleg, pezh eo d'am soñj « emzalc'h, aergelc'h, kevredigezh, sevenadur » e brezhoneg. Ma lavarfen e saozneg « *I'm a member of an association which defends breton culture, language, music ha civilisation* », den ne laro din eo ar frazenn-se soazneg ar saout. Ma lavarfen e brezhoneg « Me zo barzh un asosiation hag a zifenn kultur, lañgach, muzik ha sivilisation Breizh » e vo laret din gant lod eo brezhoneg ar saout, pezh n'eo ket : heñvel eo pozhioù speredek en oll yezhoù. Pezh a gont muioc'h eo muzik ar yezh, ha e gapasite da fardañ pozhioù evel « tristidigezh » goude ma teu « trist » deus al latin. Ya, dav eo reiñ kalon d'ar skolidi evit deskiñ ar yezh : med ne chomo ket ur c'helenner war ar muzik heb larout d'e skolidi cheñch o mod ma teu notennoù fall ganto. E saloñ Karaez diwezhañ 'meus klevet kalz tud o komz brezhoneg gant un taol-mouezh galleg, nesep ur paotr yaouank eus Koera, o chom e Breizh abaoe daou bloazh nemedken : evel Makoto gwechall ! 'Blam petra an diaoul n'eo ket kap kalz vrezhonegerien nevez (pas toud, giz 'meus skrivet) ober pezh a ra ken fonnus ur paotr deus Korea ? Komzet 'meus gant Herve ar Beg e Karaez : gras dezhañ hag e geneiled eo bet despugnet dielloù prizius RKB. Laret 'neus din hag e gav drol klevout brezhonegerien yaouank komz mad-tre e saozneg, taol-mouezh dereat ganto, ha mont gant un aksañ galleg e brezhoneg ! Mat vefe soñjal barzh an dra-se. Leun e skouarn ha ma hini ivez

gant brezhoneg « me ’meus *galette au beurre* », evel ma skriv Malo Morvan barzh e dezenn.

Ur fazi ran gant doujañ : mat, dre ma brasañ faot eo, evel evit Sciences-Po ha « Trois Glorieuses ». Med piv n’eus skrivet « *A mon avis, c’est un concept assez ambigu* », a skriv HL : un den añvet Ronan Huon an hini eo... Ma ne oar ket HL lenn un notenn hag e referañs e fin ur bajenn eo poent dezhañ cheñch labour...

« *Je ne suis pas raciste, d’ailleurs j’ai un ami Arabe* » : ma mije amzer da goll e gasfen un alvokad war lerc’h H. Latimer. Ne rin ket kar tud simpa ’zo barzh skipailh *Al Liamm*. Ur rasist evel don ’zo bet paeron ur bugel deus ar Rwanda e-pad 12 vloazh. Marc’hagnet eo bet sur awalc’h e-pad ar gouennlazh. Abaoe omp me ha ma wreg paeron ha maeronez plac’hed deus bro India.

Abaoe 40 vloazh emaomp isili *Aide et Action*. Reiñ a ran kentelioù galleg d’eur paotr yaouank deus an Afghanistan. Bet on bet barzh an UDB e-pad 12 vloazh, ur strollad rasist kenañ... Kalz maouezed barc’hadet gant o kwazioù ’zo bet sikouret ganeomp : goudor, alioù, arc’hant ’zo bet roet dezho, ha sikouret ’meus unan evit embann e envorennoù : Saskia Hellmund. Evit un den a ne ra ket plas d’ar merc’hed...

Trawalc’h bremañ : mont a ran da selaou chadenn *Brezhoneg bew* war You Tube !

PRIZ LANGLEIZ

E Karaez, da vare Gouel al Levrioù, eo bet roet ar priz d’an 30 a viz Here. Enoret eo bet Paol ar Meur evit hollad e oberennoù skrivet. Tudual Huon en deus displeget piv ’oa ar Brestad Paol ar Meur ha pere eo e oberennoù, kalz pennadoù beaj ha faltazi en o zouez. Gaëtan de Langlais a oa aze evel bep bloaz. Trugarez d’an tiegezh Langleiz.

PRIZ DANEVELLOÙ KÊR KARAEZ _____

Laouen-bras eo *Al Liamm* o kemenn eo gant Gael Briand eo aet ar maout ar bloaz-mañ. En niverenn 451 Meurzh-Ebrel 2022 e kaver an danevell bet priziet : *Ar vran hag ar valafenn*. En em lakaet eo Gael Briand da skrivañ ur pennadig zo. N'eo ket ur brezhoneger a-vihanik. Sevel a ra danevelloù dreist-holl ha lezel e ijin da zispakañ e brezhoneg. Gourc'hemennoù dezhañ. Ra vroudo ar prizioù-se ar re yaouank da skrivañ, empentiñ hag embann a bep seurt testennoù faltazi.

PRIZ UNVANIEZH SKRIVAGNERIEN BREIZH _____

Da-geñver emvod meur *Unvaniezh Skrivagnerien Breizh*, dalc'het e Begerel d'an 2 a viz Here, eo bet embannet disoc'h *Priz Per Jakez Helias*, roet bep bloaz d'ul levr e brezhoneg. Resevet o doa 9 levr ar wech-mañ. Setu ar re zo bet dibabet gant ar bodad barn, ennañ Josette Bouvet Le Meur, Thierry Châtel, Evelyne Pernel ha Michel Priziac.

Priz kentañ : *Dindan ar bili, an traezh* gant Filip Oillo – Eil priz : *Mont gant an hentoù eus Porzhig da vMikêl Groñvel* gant Herve ar Gall – Trede priz : *Kezeg direizh* gant Frank Bodenes.

DISPAK _____

Ur media enlinenn, hollvrezhonek, digoust ha liesvedia eo *Dispak*. Diwanet e oa ar c'hoant da sevel al lec'hienn internet-mañ diwar an diouer a bennadoù unyezhek a veze kavet war internet. Abaoe 2018 e kinnigomp neuze pennadoù war ar bed a-vremañ, met ivez dre geleier berr dre ar rouedadoù sokial da skouer.

Hor pal eo kinnig ur savboent breton war ar vro hag ar bed, reiñ ur skeudenn vodern eus hor yezh, evit adperc'hennañ hor yezh dre al lenn hag ar skrivañ.

Ur media kevredigezhel eo *Dispak*. Un degad a youlidi a zo ac'hanomp izili ar gevredigezh. Pep hini a ra diouzh h-e c'hoant hag h-e amzer Ur muiañ-niver a vaouezed a zo er skipailh.

Un doare da virout ul liamm gant ar yezh a c'hallomp bezañ. An dra-se hon eus merzhet e-pad ar prantad kenfinañ kentañ ivez : kalz muioc'h a dud a zo bet o welet lec'hienn *Dispak* e-doug ar prantad-mañ, pa oa diaes kenderc'hel da vevañ e brezhoneg. Ur benveg e c'hell bezañ hol lec'hienn evit ar gelennerien ezed brezhonek ivez er skoloù, liseoù pe c'hoazh evit an dud a gelenn d'an oadourien kement hag evit an deskarded ha deskardezed oc'h heuliañ stummadurioù hir.

War-zu ar vicherelaat ez omp bremañ. Rak merzhet hon eus eo diaes deomp kenderc'hel gant ul lusk skrivañ reoliek diwar youl hor skipailh nemetken. Difrejañ ha paeañ ar skrivagnerien ezed a fell deomp ober. Un doare da vountañ an dud da skrivañ e brezhoneg ha talvoudekaat al labour-se eo ivez goprañ ar skrivagnerien ezed. Ha kement-mañ a c'hallimp ober a-drugarez da skoazell *Ar Redadeg* 2022.

Testenn bet skrivet gant Dispak

TEZENN ROZENN MILIN

Ul labour bras-kenañ he deus savet Rozenn Milin gant un danvez a chom bev e spered tud ar vro hiziv c'hoazh. Rak ur bobl a-bezh eo a zo bet stroñset gant an doareoù gwidreus ha vil bet implijet evit rediañ ar vrezhonegerien vihan da zilezel o yezh. Kalz Stadoù o deus bet evel pal disverkañ ha lazhañ yezhoù zo hag implijet a bep seurt doareoù disenel. Ha kavet 'vez c'hoazh gwas-kerezh war an dachenn-se, hiziv an deiz, siwazh. N'eo ket bet ankounac'haet “ar simbol” !

Spi hon eus e vo embannet dizale ul levr gant he labourioù war an dachenn-se. Ha digarez he do da vezañ pedet da zisplegañ ha da eskemm war un danvez ken kizidik ha don.

TREGONTVET DEIZ-HA-BLOAZ SKED _____

D'ar Sadorn 18 a viz C'hwevrer 2023 e Mediaoueg François-Mitterrand-ar Gapusined (aoditoriom), Brest.

Reiñ lufr d'ar brezhoneg ha da sevenadur Breizh e Bro-Vrest, hennezh eo pal ar gevredigezh SKED. Evit lidañ he zregontvet deiz-ha-bloaz, SKED ha mediaoueg ar Gabusined a ginnig un abaden evit ar vugale hag ur gendael lennegel :

Programm :

- 10e30

Nij, un arvest margodennoù ha kanaouennoù e brezhoneg hag e galleg, gant Awenn Plougoulm

- 14e30

Peseurt plas evit Kêr-Vrest el lennegezh vrezhonek ?

E-touez ar c'hêrioù bras eus Breizh, ez eo Brest an hini a vez meneget ar muiañ el lennegezh vrezhonek. Liesseurt-kenañ eo ar romantoù, danevelloù ha barzhonegoù a ra anv eus Brest. Ar pezh a fell dimp eo diskouez emzalc'hioù ar skrivagnerien hag an tudennoù e-keñver ar gêr vras en he holl arvezioù.

Ur brezegenn gant Fulup Lannuzel a vo diwar an danvez dastumet el lennegezh vrezhonek abaoe *Gwalarn* betek an deiz a hiziv. Da c'houde e vo un daoliad-grenn gant ar skrivagnerien a zo bet studiet o oberennoù hag un eskemm gant ar saliad :

Gant : Jorj Abherve-Gwegen, Yann Bijer, Paskal Hervio, Erwan Hupel, Pierrette Kermaal, Goulc'han Kervella, Fulup Lannuzel, Laurence Lavrand, Paol ar Meur, Filip Oillo.

Ar gendael a vo kaset en-dro gant Mikael Baudu.

BODADOÙ-LENN

E Brest e vez aozet ur bodad-lenn *Deus 'ta*. Jil Penneg a oa bet eno evit kaozeal diwar-benn trede levrenn *Koktel ar vuhez*.

Kenderc'hel a ra ar bodad-lenn aozet gant *Lipouserien gerioù* e Brest, aozet gant mediaoueg ar Gabusined, e-lec'h ma oa bet Jil Penneg e miz Here.

E Ti ar Vro Lesneven e vez aozet bodadoù-lenn ivez.

E mediaoueg Plougerne, lusket gant Paskal Hervio, bep trimiziad e vez aozet un abadenn-lenn. Jil Penneg, Goulc'han Kervella hag Herve Lossec a vo pedet eno d'an 19 a viz Ebrel 2023.

E Ti ar Vro Landerne e vo azoet bodadoù-lenn lusket gant Serj an Huede.

E Ti ar Vro Kemper e vez un abadenn bep miz. D'ar Merc'her 14 a viz Kerzu e oa bet Jorj Abherve-Gwegen o kinnig e romant *Morlenn*.

E Kawan en em vod lennerien e Ti ar Vro Treger ha Goueloù, ur wech ar miz. Visant Dubois, levraoueger an ti a ra war-dro. E miz Here e oa *Dulenniz e oant* gant James Joyce, bet troet gant Herve Beg. E miz Du eo 1973 gant Bernez Tangi ha bet embannet e 2016 a oa bet dibabet hag e miz Kerzu eo *An dour en-dro d'an inizi*, nevez embannet a zo bet lennet da-geñver 50 vloaz marv ar skrivagner.

Bep miz en em vod *Lenn a-stroll* e Roazhon abaoe 2005. E miz Here eo *Mari Vorgan* Roparz Hemon a zo bet lennet gant an izili. Ha niverus e oant c'hoazh e miz Du evit *Dulenniz e oant* gant James Joyce. Pedet e oa bet Herve Beg, an troour, hag un eskemm bev a frouezus a zo bet da-heul soñjoù pep hini war an dastumad danevelloù-se. Hag evit klozañ ar bloavezh eo pennadoù berr ha plijus *Karnedoù un ergerzhour difiñv* Herve Gouedard a oa bet dibabet lenn.

D'ar c'hentañ a viz Kerzu e oa bet aozet e Ti ar Vro Kemper un nozvezh eskemm a-zivout Youenn Drezen, kaset en-dro gant Bernez Rouz. Kinniget e oa bet film istitlet Mari Kermareg diwar-benn Y. Drezen hag ivez embannadur kentañ an danevell *An dour en-dro d'an Inizi* skeudennaouet, hag ar mell studiadenn savet gant

nav den eus *Bodad Lenn* Ti ar Vro Kemper : « E koun Youenn Drezen ».

E Naoned hag e Bro-Gwened ez eus bodadoù lenn ivez. Trugarez da gas keloù d'*Al Liamm* evit ma c'hellfemp brudañ an holl emgavioù.

BOSLIT, UR RENABL EUS TROIDIGEZHIOÙ LENNEGEZH BRO-SKOS EN HOLL YEZHOU AR BED

Diwar c'halloud an urzhiaterezh e vez tu bremañ da sevel renabloù klok pe gloc'h eus kement tra a c'hell bezañ. Diouzh ar c'hiz e vez enta ar *big data* (mell stlenn pe melloù roadoù) hag an *databases* (bonioù stlenn pe stlennvonioù). Gant Skol-veur Glasc'ho (*University of Glasgow*) ha gant Akademiezh Vroadel Bro-Skos (*The Royal Society of Edinburgh*) eo bet adlañset da vat ar raktres laketa war-sav er bloavezhioù 1990, hag a zo e bal renabliñ dre holl yezhoù ar bed an holl embannadurioù bet troet diwar lennegezh Bro-Skos, ha pa vefe en saozneg, en skoteg pe en gouezeleg. *The Bibliography of Scottish Literature in Translation* (BOSLIT) a vez graet eus ar raktres-se, da lavaret eo, Levrlennadurezh al Lennegezh Skosat war Droidigezh. Tu a zo da c'houzout hiroc'h diwar-benn krouidigezh, istor hag emdroadur al labour-se war ar blog-mañ : <https://blog.boslit.glasgow.ac.uk/index.php/history-of-boslit/>

Anat deoc'h, n'eo ket klok an traoù c'hoazh avat, met kavet e vez memes tra evit ar poent un 30 000 bennak a fichennoù o reiñ titouroù-diazez diwar-benn troidigezhioù e 104 yezh, eus marevezh ar Grennamzer bete vremañ. Hag en o zouez, na petra 'ta, troidigezhioù en brezhoneg, 23 anezho, e stumm pennadoù pe levrioù, evel ma teu war wel pa vez furchet war lec'hienn BOSLIT war-bouez « brezhoneg » evel yezh-treñ (*translation language*) : <https://boslit.glasgow.ac.uk/browsebytrlanguage>. Dedennus-bras (ha lorc'h da gaout evit skipailh *Al Liamm* !) eo gwelet e teu al lod brasañ (20 diwar 23) eus an troidigezhioù brezhonek-se diwar *Al Liamm*, anezho pennadoù e-barzh ar gelaouenn pe levrioù an

ti-embann. Gant *Brud Nevez* eo bet embannet ar skouerioù all. Kavet e vez enta da skouer anvioù Yeun ar Gow, Per Denez, Fañch Elies, Kerlann, Mikael Madeg, pe Jarl Priel a-hed ar fichennaoueg. Ret eo lavaret avat n'eo ket disi ar fichennoù hag e chom kalz a vankoù da glokaat, na pa ve ken e-keñver korpus niverennoù *Al Liamm*, ha dreist-holl e-keñver troidigezhioù koshoc'h, e-giz ar re bet kaset da benn e-barzh *Gwalarn*.

Iwan Couée